

Mag anavêfen ar mein

Mag anavêfen ar mein ha douar an heñchow
Pere ‘zo mired gante tressow ho kammejow

Me ‘sa’efe or pales gante oll assambles
Ewid klosañ ma c’halon én ho choñj da james

‘Vel t’an dour ‘tre ma diwvos ‘mâ klàsked ho tàlc’hen
Ne jom enni ‘med ho choñj a dapenn da dapenn...

Ma mallozh d’an drujhunell¹ ha d’hé c’han didrugar
Ewid dêi konto² din-me ‘med deus koll ha glac’har

(Armel an Héjer)



¹ An drujhunell = an dru(zhu)nell.

² Ewid dêi konto = ewiti da gontañ, awiti da gontin.

Si je connaissais les pierres

*Si je connaissais les pierres et la terre des chemins
Qui ont conservé la trace de tes pas*

*J'élèverais avec elles un palais
Pour enfermer mon cœur à jamais dans ton souvenir*

*Comme l'eau dans le creux de mes mains, j'ai cherché à te retenir
Mais il ne reste que ton souvenir, goutte à goutte...*

*Malheur à la tourterelle et à son chant sans pitié
Qui ne parle que de perte et de chagrin*

(Armel an Héjer)